

Fichenn enskrivañ da
DEVEZH-STUDI
D'ar Sadorn 23 a viz C'hwevrer 2019

Da gas da : KEAV
22 hent Mouliouen 29000 KEMPER
keav@keav.bzh / sofilehunseg@gmail.com

ANV

ANV BIHAN

CHOMLEC'H

.....

Pgz E-meil.....

Dibab goude kreisteiz : Dibab 1 Dibab 2

Priz an devezh : 29 € (mizoù pedagogel ha pred)

D'ho kelaouiñ : Skol-hañv K.E.A.V. 2019

Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerion

Div sizhunvezh-studi a vo kinniget ar bloaz-mañ c'hoazh :

Ar prantad 1añ : eus ar Sul 7/07 da noz

d' ar Sadorn 13/07 a viz Gouere da greisteiz.

An eil prantad : eus ar Sul 14/07 da noz

d' ar Sadorn 20/07 a viz Gouere da greisteiz.

***Bez e c'hellit dibab chom ur sizhunvezh hepken,
pe chom an div.***



KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERION

***A ginnig deoc'h un devezh-studi
diwar-benn :***

**AL LENNEGEZH VREZHONEK
A-DREUZ AR C'HANTVEDOÙ**

BREZHONEG LEON E PENN PELLAÑ KERNE

OSTILHOÙ NIVEREL E BREZHONEG

D'ar Sadorn 23 a viz C'hwevrer 2019

Er greizenn Amzer-Nevez

56270 PLAÑVOUR

ROLL AN DEVEZH

Adalek 9 eur 1/2

Degemer ha banne kafe

Da 10 eur nemet 1/4

gant Paskal TABUTEAU

AL LENNEGEZH VREZHONEK A-DREUZ AR C'HANTVEDOÙ

Mont da vale dre hentoù-treuz al lennegezh e brezhoneg, abaoe gwerzennoù Ivonet Omnes betek oberennoù ar bloavezhioù 50 ha 60, setu ar pezh a ginnig Paskal Tabuteau ober.

Pezhioù-c'hoari kozh ha nevez, barzhonegoù, Barzhaz-Breizh, kelaouennoù e brezhoneg an XIXvet hag an XXvet kantved, Gwalarn hag he susitourien... digarez ho po aze, gwalc'h ho kalon hag ho spered, da glevet pe da adklevet, berr-ha-berr, istor lennegezh ur yezh bet rebechet dezhi, re alies, da vezañ bet, a-viskoazh, ur yezh ... hep lennegezh...

Paskal Tabuteau.

Ganet eo bet Paskal Tabuteau e-kreiz an douaroù, e Montmorillon, war ribl ar ster-Gartempe, ar poatevineg eo ar yezh kentañ en deus klevet. Desket en deus brezhoneg a-drugarez da brantadoù gant SAV, Roudour pe Stummdi er bloavezhioù 80 ha 90. Kemeret en devoa perzh e KEAV, evel stajiad ha kelenner tro fin ar bloavezhioù 90. Kelenner war ar brezhoneg er bloavezhioù 2000 er Mor-Bihan, ez eo bremañ, a-berzh an Deskadurezh-Stad, oc'h ober war-dro an hentenoù divyezhek en hevelep departamant.

Troet-kenañ eo gant ar varzhoniezh hag al lennegezhioù keltiek kozh. Savet 'z eus bet meur a levr gantañ, evel, "Beaj Sant Brendan" embannet gant Emgleo Breiz, "Lae Izold" ha "Kan 1 Ilias Homeros" embannet gant Al Liamm ha "Perlez va Daeloù" embannet gant Aber.

Ar Priz Imram en deus bet e 2014 evit e levr "Lae Izold".

Da 12 eur 1/2

Merenn

Da 2 eur gk

DA ZIBAB

1 - BREZHONEG LEON E PENN PELLAÑ KERNE

Gant Pêr Iwan KERSULEG

Ur sell war yezh kaer an Enez-Sun, ha war ar gounid a c'heller tennañ anezhi evit pinvidikaat ar brezhoneg.

Gant Pêr Iwan Kersuleg e vo kinniget ur sell a-vras war dibarderioù yezh "Kear" (dle. an Enez-Sun), a-fet : distagadur, geriaoueg, hag ereadur en ur vont diwar tammoù enrolladurioù ha tammoù filmoù.

Pêr-Iwan KERSULEG .

Genidik eo Pêr-Iwan eus Kemper. Kelenner brezhoneg eo e Brieg.

Stummet eo bet e skolioù-meur Brest ha Roazhon. Studiet en deus bet brezhoneg an Enez Sun e-pad ur pemp bloaz bennak etre 2010 ha 2015.

Savet en deus ur geriadur hag ul levr pennadoù komz, diwar ar rannyezh-se, a zo da vezañ embannet gant Kuzul ar brezhoneg e 2019 – 2020.

2 - OSTILHOÙ NIVEREL E BREZHONEG

Gant an Drouizig

Meziantoù, arloadoù, difazier, lec'hiennoù web... Un dornad a ostilhoù niverel a zo e Brezhoneg, met n'eo ket aes gouzout petra ha penaos ober ganto. Kinniget e vo ur renabl eus ar raktresoù pennañ ha penaos staliañ ha kefluniañ anezho evit o lakaat e brezhoneg war ho pinviji. Gallout a rit degas hoc'h urzhiataer, pellgomzer hezoug pe alc'hwez USB.

An Drouizig a zo ur gevredigezh krouet e 2003. Kas ar brezhoneg war-raok war an teknologiezhioù nevez eo he fal. Ouzhpenn treiñ meziantoù evel Mozilla Firefox ha Thunderbird e labour he izili war un difazier brezhonek, ur c'hlavier "c'hwerty" ha troidigezh c'hoarioù video hag arloadoù hezoug. Aozet e vez ivez nozvezhioù staliañ evit brudañ ha staliañ an ostilhoù niverel e brezhoneg

'Tro 5 eur – 5 eur ½ Bilañs an devezh-studi